

Troude ha **Milin** : **Ar marvailher brezoneg pe Marvailhou brezoneg**, dastumet gand ar horonal **A. Troude** ha **G. Milin** (ar galleg a zo dirag ar brezoneg). Brest 1870.

Notennoù : Modernnaet eo bet an doare-skriva. N'eo ket gwir e vefe galleg e-barz. Skrivet eo gand an dorn al leor a zo bet prestet din gand Skol-Veur Vrést.

Troude : Brést 1803 – Brést 1885). Levezonet eo Milin, gwechou 'zo, gand ereadurez ar galleg.

Faziou rannouigou-verb ha reiz an anoïou a zo.

*

Treiz Plougastell Tost da Vrést

Perag ez eus rehier e tu Kerne
ha ne deus nikun e tu Leon ?

Eur mintinvez, e-tro teir ha peder eur, eh arrujon e treiz Plougastell o tond euz ar vourh ; n'oa na deiz na noz. Ar vagerien, dihunet gand eun tad-koz en-doa mall da weled e vab-bihan arruet e rad¹ an deiz a-raog, a oa o vond da boulza.

Kerkent ha lammed er vag, e kuitajom Kerne evid Leon. Huanad ebed ne glever : ar roeñvou hepken o soubla er mor, a ra eun trouz bennag.

An tad-koz, betgwechall martolod, a zoñje er broiou-pell en-doa gwelet. Jopig, e vuia-karet, a roje dezañ kelou euz e yaouankiz.

Evidon-me n'oan ket evid distaga va daoulagad dioh rehier Plougastell. O skeud a holoe ar mor ; o fenn e-touez ar hoabr, o horv du ha bodennuz a stage va daoulagad.

« Perag,emeve, kemend a rehier e Kerne ha nikun e Leon ? »

« Perag ? paotr yaouank. Pa vezo glazet ho pleo evel va re gand ar barrou-amzer, eh ouzoh an dra-ze. »

« Plijadur am-befe o houzoud² kement-se, a-raog ma vezo glazet va bleo. »

« Pa'z eo gwir n'hoh-eus ket a zismegañs ouz ar re goz, selaouit ar pez a livirin deoh evid ma hellot eun devez lavared ivez an dra-ze d'ho pugale vihan. »

*

Gwechall ez oa truk amañ, pa'z eo gwir eur wech, an diaoul, skuiz o kleved meuleudi karantez tud Vreiz-Izel, a zeuas e-unan d'o gweled, rag diêz 'oa dezañ kredi e ve kemend a vadelez e-touez an dud.

Er vro-mañ eh arruas, ha neuze eh en em wiskas gand dillad eur paour-kêz. E zah goullo war e skoaz, e vaz en e zorn, ez eas da skei war dor eur pesketaer koz. Ker buan hag e oe digoret an nor, ar pesketaer a anavezaz anezañ diohtu en despet d'e vouez ha d'e bedennou truezuz. An den fall a zo atao gantañ eun dra bennag hag a droh anezañ.

« Deut en ti », eme ar pesketaer.

Kerkent ha m'en-devoe an droug-spered lakaet e droad dreist an treuziou, ar paotr koz a zerras gand nerz an nor, hag a foultras ar paour-kêz war mein an aod.

An diaoul, bloñset e izili, a zavas en eur grosmolad, hag eun tammig pelloh ez eas en eun ti all.

¹ rad : ar vorlenn.

² o houzoud : fazi bet greet a-viskoaz. "da houzoud".

Tud an ti, a-roag mond d'o labour, a lavare o chapeled, hag etre diou bedenn e oe klevet eur vouez klemmuz ha skiltruz e-tal an nor.

« Digorit din, a lavare ar vouez, naon ha riou am-eus. »

« Kee da zigeri d'ar paour, Biganna. »

« Aon am-eus, biskoaz n'em-eus klevet eur vouez ken euzuz. »

« N'eus forz ! arabad lezel den er-mêz. »

Kerkent ha ma vije gwelet e dreid skrabet, e fri sparfell, e zent lemnet, ha dreist-oll e zaoulagad ruz-tan, an oll a anavezaz an droug-spered.

Pep hini, o veza greet sin santel ar groaz, en em lakaas da ober goap anezañ ha d'e gas er-mêz en eur deurel warnañ kement berad a oa er vuredenn dour benniget.

« Paket on bet ! », eme an diaoul.

Kounnar ennañ kenañ, e tehas dirag ar galloud-se. Koulskoude ez eas d'eul lochennig a weled du-hont e riblenn ar mor. N'oa nemed eur bugel en ti.

« Va mab, eme ar paour ; n'eh-eus netra da rei din da eva ? »

« Eo avad !, eme ar paotr. Setu amañ lêz-ribot. »

Ken treñk ha ker fall 'oa al lêz-mañ, ne vije ket debret gand ar moh. Ar paour, o veza tañvaet al lêz, a foultras anezañ war al leur hag en em daolas er mor.

Arruet en tu all, ez eas da skei war dor eun intañvez. Eun arne dirollet a ree, ar glao a goueze puill hag ar gurun a hourdrouze.

« Naon braz am-eus », emezañ.

An intañvez, goude eur zell, a anavezaz enebour an dud. Koulskoude e soñjas :

“An den pa'z a da glemm a zo dreist an oll...”

« Deut en ti, emezi, setu amañ peadra da derri ho naon, ha tan da domma hoh izili. »

En eur lavared an dra-ze, an intañvez a laka dirag ar paour eur vasinad vraz a yod. Hag o palarad e-verr ganti, en eun taol-kont e oe lipet ar yod ha diou bodezad lêz kaoulet.

« Mad eo ar yod ! maouez ; n'hellfeh ket rei din kemend-all ? »

« Eo, eme an intañvez, diohtu e vezo poaz ar pouloud. »

Ha ker buan e oe lakaet dirazañ leiz ar vasin-kouëz a bouloud hag eur bern krampouez. Eunnebeud goude, ne chome netra ken da zebri.

An diaoul neuze, o sevel diouz taol, a lavaraz d'an intañvez :

« Plijadur vraz hoh-eus greet din. N'hellfen ober netra evidoh ? Nerzuz on, ha n'eus forz peseurt labour, me a raio diohtu. »

(En amzer-ze, klevit, ar rehier braz ha bihan a weler bremañ e tu Plougastell a oa e tu Leon).

« Peadra a-walh am-eus da zevel va bugale ; va douarou a zo mad, n'em-eus poan nemed abalamour d'am amezeien, eme an intañvez. Sellit oh ar vein-ze, ma ne vijent, n'em-be netra da houlen. »

« Ha ne deus ken evid ober plijadur deoh ? »

Hag o veza tennet e jupenn, Paol-Gorneg a gemeras ar rehier an eil goude eben, hag a daolas anezo en tu all d'ar mor, e leh ma'z int abaoe.